

An Ilias

Brezhoneg gant Paskal Tabuteau

ΙΑΙΑΔΟΖ Α.

Kan kentañ

Kaouad fulor Akilleus ar Peleid¹⁰, ra gani dimp, Doueez,
diwar he fenn. Ar gounnar noazus a dalvezas d'an
Akeaniz¹¹

un diniver bras a boanioù, ma voe taolet da Hades
lies a eneoù lorc'hus ha troet da breizh ar c'hon hag
holl evned an Neñv

05 kelanoù an harozed-se, da Zeus da gas E¹² vennad da
benn.

Boulc'h da istor pa savas bec'h etre an Atreid,
Penntiern e bobl

hag Akilleus, par d'un Doue. Pe z/Doue en deus o
lakaet d'en em rendaelat

ha d'en em gannañ ? Letho eo, mab Zeus. Hennezh,
kounnaret

ouzh ar Roue, a lak ur walenn-a-gastiz da zirollañ

10 war al lu a-bezh, ma varv pep den anezhañ,

10 Peleid = Mab Pele (Pe « AbPele »).

11 Unan eus anvioù Gresianed brezelioù Troia a vez
graet ivez Danaed pe Argeiz anezhe en Ilias.

12 Al lizherenn « E » e vo graet ganti em skrid pep
gwezh ma vo anv eus « Zeus ».

rak an dismegañs graet ouzh Krides, E veleg.
Aet eo Krides betek listri lijer an Akeaniz
evit adprenañ e verc'h, gantañ en e zorn
ouzh e vazh aour, lurell Apolon A-Sko-a-Bell.

- 15 Aspediñ a ra an holl Akeaniz,
an daou benntiern dreist-holl, mibien Atre anezhe :
« Mab Atre,
ha c'hwi ivez, Akeaniz ho knemidoù¹³ kaer, ra ho lezo
an Doueed
da zistrujañ Kêr b/Priam¹⁴, deoc'h-hu da vont d'ar gêr
en dro,
yac'h ha dibistig. Hogen, din-me, ra vo daskoret va
merc'h !
- 20 Teurvezit e paefen an daspren anezhi,
dre azaouez e-keñver mab Zeus, Apolon A-Sko-A-Bell »
Neuze, en ur vouezh, e sav an holl Akeaniz a du :
« Ra vo douget bri d'ar beleg ! Ra vo degemeret an
daspren hollgaer ! ».
Agamemnon, Mab Atre, avat n'eo ket se diouzh e
zoare.
- 25 E gas a ra kuit, taer e c'hourc'hemenn :
« Diwall diouzh da gont, den kozh, ma en em gavan
ganit,
te o ruzañ war-dro al listri dibont, pe e ve hiziv pe e
ve arc'hoazh !
Na da vazh, na da lurell zoken, n'az tiwallfe ouzh tra !
Ne zaskorin ket an hini a vennezh. Tizhet e vo bet,
kent, gant ar gozhni,

13 Knemid(-où) : gwiskamant arem a lakaed war pep
kof-gar d'o diwall ouzh an taolioù kleze.

14 Troia pe Ilion.

- 30 em falez, en Argos, pell diouzh he bro.
Ouzh ar stern-gwiader e vo, 'tro-pad an deiz, hag hi
ha dont
d'am gwele p'he galvin. Kae ha n'am hegas mui ma
vennez mont divac'hagn ».
Ouzh e vouezh e sent an hini kozh, krog an aon ennañ.
Kuit e ya, didrouz, a-ribl an aod ma trouz ar mor.
- 35 Ur wezh e-unan-penn, e asped start ar c'hozhiad
An Aotrou Apolon, Mab Letho e vlev kaer.
« Doue-da-Wareg-Arc'hant, va selaou ! Te hag a ziwall
Krize
ha Killa ken Douel, te hag a ren war d/Tenedos ! Ô
Sminte !
Ma 'm eus biskoazh peurdoet dit azeuldi ebet a ve bet
diouzh da c'hrad,
- 40 ma 'm eus biskoazh deuet evidout morzhedoù druz
tirvi ha girvi, klev ouzh va fedenn. Gra d'az saezhoù
damantiñ
va daeroù D'an Danaoiz. » Ma lavar se, o pediñ,
ha gant Phoibos-Apolon ez eo klevet.
Diskenn a ra diwar lein Menez-Olimpos, araj en e galon,
- 45 e wareg gantañ ouzh e skoaz, e gargas
peurgloz d'an daou du, ma stirlink ar biroù enni
war skoaz an Doue buanekaet, a-greiz ma ya,
heñvel ouzh an noz. En em bostañ a ra en distro
diouzh al listri,
hag e tenn ur bir, ma trouz ar wareg arc'hant en un
doare spontus.
- 50 Tizhet eo ar vuled gantañ da gentañ hag ar c'hon o
zreid skañv ivez.
Gant ar wazed e tenn, goude-se, saezhoù c'hwerv, ma
tev

- a-gantoù ha diehan ar vuchedoù. Nav devezh pad
e nij saezhoù an Doue dre al lu. D'an dekvet e galv
Akilleus
an holl gwitibunan d'ar Vodadeg. Hera an hini eo,
55 Doueez Gwenn-He-Divrec'h, he deus lakaet ar soñj-se
en e galon.
Damant he devez ouzh an Danaoiz p'o gwel
o vervel evel-se. Adal m'emaint bodet,
Akilleuz Skañv-E-Dreid a sav hag a lavar dezhe :
« Mab Atre, mont a reomp hep dale, me 'gred, da
zistreiñ
60 war hor c'hiz – ma c'hellomp diarbenn ar Marv.
Brezel ha Bosen, o skeiñ war un dro, e vo damesaet
gante an Akeaniz.
Deomp hag atersomp un Diviner pe ur Beleg, pe
unan hag a oar lenn
an hunvroù. Rak a-berzh Zeus e teu pep hunvre.
Hennezh a lavaro dimp pe abeg zo da vuanegzh
Phoibos-Apolon,
65 hag eñ e klemm war ur ro torret, pe ur c'hantaberzh
ankounac'haet.
Gwellomp ma responto ouzh galv burezh an ein
hag ar gevr dinamm ha ma venno diarbenn hor
walenn a gastiz ».
Ma lavar-se ha koazezañ goude. Setu ma sav Kalc'haz
mab Thestor en e sav.
Hennezh eo a-bell an Diviner barrekañ pa anavez
70 ar Bremañ, an Dazont, an Tremened.
Gouvezet en devoa kas listri an Akeaniz betek Ilion
gras d'an Arzh a Zivinerezh, deuet dezhañ a-berzh
Phoibos-Apolon.
Gant furnezh hag a glev d'an holl e lavar :

- « Akilleuz, karet gant Zeus, fellout a ra dit neuze e komzfen
- 75 diwar gounnar Apolon, An Doue A-Sko-a-Bell.
 Mâ... Komz a rin. Nemet, te, va entent ervat,
 ha tou war da le em skoazii krenn gant ar gomz hag
 an dorn.
 Rak, mont a ran, hep mar, da lakaat
 droug da sevel en unan hag a sent outañ an holl
 Akeaniz.
- 80 Ur Roue e vefe aes dezhañ kemer e greñv war un den
 a renk izel.
 Gellout e c'hello ervat, un devezh-pad, gwaskañ war
 e imor.
 Bev e chomo avat e gasoni en e askre, ma c'hello
 diwezhatoc'h
 he gwalc'hiñ e koulz vat. Gwellomp 'ta, ma 'z out
 prest da ziwall va buhez ».
- Akilleus Skañv-E-Dreid a respont neuze dezhañ :
 « Bez dinec'h
- 85 ha lavar dimp, didro-kaer, ar pezh a ouiez diwar setañs
 An Doueed.
 Biken, dre Apolon karet gant Zeus, a gasez dezhañ da
 bedenn pa vennezh
 diskuliañ d'an Danaoiz setañsoù an Neñvoù, keit ha
 ma vin bev,
 keit ha ma chomo digor va daoulagad, biken er bed-mañ,
 e-tal holl listri dibont ne astenno den warnout e zorn
 pounner.
- 90 Nann, den ebet a-vesk an holl z/Danaoiz, ha pa soñjfes
 amañ e Agamemnon
 a vez dalc'hmat o fougeal bezañ a-bell an hini kentañ
 el lu ».

Ma kemer kalon an Diviner direbech hag e lavar :
« N'eo ket evit keloù ul le pe ur c'hantaberzh
ankounac'haet eo e klemm an Doue.

Abalamour d'E veleg avat ne lavaran ket, bet
dismegañset gant Agamemnon

95 pa nac'has reiñ he frankiz d'e verc'h ha degemer an
daspren anezhi.

Setu perak ho lakaas An Nep-A-Sko-A-Bell da
ziwaskañ poanioù hag ho lakaio
c'hoazh. Ne zistroio ket diwar an Danaoiz ar walenn
a-gastiz dismegañsus

kent dezhe bezañ roet en dro d'he zad ar plac'h
yaouank he selloù lemm,

kuit a zaspren, kuit a varc'had, ha bezañ kaset da
g/Krise ur c'hantaberzh santel.

100 Neuze hepken hor bo E habaskaet hag E gendrec'het ».
Ma koazez neuze en-dro hep lavarout mui. Setu ma
sav an haroz en e sav,

Agamemnon Mab Atre, ar Priñs galloudus. Doaniet-
bras eo ».

Ennañ e sav ur gounnar ruz. Tanflammiñ a ra
e zaoulagad gant an droug, ma sell du ouzh Kalc'has

105 da gentañ ha ma lavar dezhañ :

« Kaner fall ! Biskoazh ne lavaris tra na ve talvoudus
din.

Atav e vourr da galon o tiouganiñ dizeurioù. Nep
eurvat avat, morse,

ne gemenez din na ne embannez. Hag e teuez
c'hoazh hiziv da lavarout

en arbenn d'an Danaoiz, hag a-berzh an Doueed, ez
on-me kiriek

110 d'ar poanioù a ziwaskont gant An Nep-A-Sko-a-Bell

abalamour din da vezañ nac'het daspren hollgaer
ar plac'h-se, Kriseis. Gwelloc'h eo ganin, e gwirionez,
he delc'her ganin du-mañ. He c'harout a ran gwell
eget Klitemnestr, ma fried reizh. Ne goll tamm warni
115 nag a-fet dalc'h pe stumm, nag a-fed ampartiz, nag
a-fed spered.

Asantiñ a ran mard eo ret, he reiñ en-dro. Gwell eo
ganin gwelout
tud va lu salv ha divac'hagn eget o gwelout en argoll.
Hogen, hag hep nep dale,
degasit din ur rann-enor all ! Amzere e vefe e vefen-me
an hini nemetañ
e-touesk an Argeiz a rankfe tremen hep nep digoll.
Sellit an holl ac'hanoc'h !

120 Emañ va rann din-me o vont da lec'h all ! ».

Neuze, Akilleuz e Dreid Mibin a lavar : « Mab illur
Atre, krafek
ha gwallc'hoantek ma 'z out ! Daoust penaos e c'hellfe
an Akeaniz reiñ
un hevelep rann-enor dit ? N'hon eus a-gostez, din da
c'houzout,
teñzor boutin ebet... Kement tra bet kavet ganimp er
c'hêrioù

125 hon eus preizhet a zo bet darnaouet...

Ha reizh e vefe o addegasfed d'ar bern ?
He c'has-hi d'an Doueed, ha ni, Akeaniz,
En dalvezo tri pe bevar c'hemend-all dit, m'hor aotre
Zeus da wastañ Troia He Mogerioù Fetiz ».

130 Ma eilgerias dezhañ Agamemnon, an Uheliad Kreñ-
vañ :

« Ha te kadarn, Akilleuz Par d'An Doueed, na glask
ket va zouellañ,

ne vin na tapet na lorbet ganit. Daoust ha lavarout a
 rez e virfez da rann
 pa vanfen em c'hoazez o c'hortoz va hini ? Ha se eo az
 lak d'am fediñ da reiñ
 en-dro an hini a zo kel anezhi. Ma ro din an Akeaniz
 Hael ur rann-enor
 135 hervez va c'halon ha ken talvoudus hag an hini a
 gollan, mat !
 M'e nac'hont avat ouzhin ez eo me an hini a yelo
 da gemer da hini, pe hini Ajaks, pe hini Odisseus,
 E gemer hag e gas ganin. Klevet e vo neuze kounnar
 an nep e vin bet aet d'e di ! Diwezhatoc'h eo avat
 140 e vo pledet gant-se. Deomp evit c'hoazh ha desa-
 chomp
 al lestr du betek ar mor Doueel. Dibabomp ur vagad
 roeñverien ampart.
 Kasomp ganimp ur c'hantaberzh ha lakaomp Kriseis
 He Divoc'h Livrin
 da sevel war vourzh hor lestr. Ra vo dibabet erfin ul
 levier
 e-touesk ar re a glever o mouezhioù er C'huzul-Meur ;
 145 Ajaks, Idomene pe Odisseus Par d'an Doueed,
 pe te c'hoazh, te da-unan, Mab Pele, Skrijusad Gour
 ac'hanout,
 ma vo sevenaet ganit an aberzh a habaskaio An Hini-
 Argasus-E-Saezhoù¹⁵ ».

Setu ma sell Akilleus e Dreid Skañv du outañ ha ma
 lavar :

15 Remerket ho peus marteze e oa liesseurt an anvioù
 a veze roet da Apolon : an hini a sko a-bell, an hini
 argasus e saezhoù, ar gronner koabroù, ar gwareger...